


Ul lec'hienn divyezhek pe liesyezhek



skouer

- 73% eus annezidi Breizh o deus c'hoant da welout muioc'h a draoù skrivet e brezhoneg (enklask TMO 2018).
- Plijet e vez ar weladenn-erien hag al luskerioù klask gant ul lec'hienn liesyezhek. Gwelloc'h eo bezañ daveet gant ul lec'hienn divyezhek !

Lec'hienn Askorn Medical a zo diorrenet e galleg, e soazneg hag e brezhoneg.

Sellit ouzh stadegoù gweladennoù ho lec'hienn. Ma teu al lodenn vrasañ eus ho kweladennerien eus Breizh eo poellek diorren anezhi e brezhoneg (poellekoc'h eget diorren anezhi e saozneg a-wechoù !)

Ho kartenn vizit war internet eo ho lec'hienn a-benn ar fin ! Kinnig anezhi e brezhoneg a ziskouez emañ stag hoc'h embregerezh ouzh sevenadur Breizh hag ouzh ar vro.

Penaos ober ?

Dav e vo deoc'h ober war-dro daou dra : an droidigezh ha diorren al lec'hienn.

An droidigezh

- Labourit gant un troour.ez a-vicher evit ar raktres-mañ, pe d'an nebeutañ evit an adlenn. Sur e vioc'h e vo direbec'h an testennoù hag e vo implijet gerioù a-zoare evit ho kennad labourerezh. Ne goust ket gwall ger treiñ ul lec'hienn (etre 50€ ha 300€ hervez ec'honad an destenn). Kemer a rit riskl e vo fazioù hag a zisprizo skeudenn hoc'h embregerezh ma vez arboellet an dispign-mañ ganeoc'h !
- Gallout a rit treuzkas URL ar pajennoù hag a zo da dreiñ d'ho troour.ez. Gallout a rit ivez dastum ar gennadoù hag a zo da dreiñ en un daolenn. An eil doare d'ober a gemer muioc'h a amzer met talvoudus eo rak ur poent a vo graet ganeoc'h war an testennoù (traoù da cheñch, da hizivaat, frazennoù a zeu meur a wech) ha posupl e vo deoc'h ouzhpennañ ar metadeskrivadurioù e-barzh listenn an troidigezhioù d'ober.

| | galleg | da dreiñ e brezhoneg |
|------------------|--|----------------------|
| URL | https://boutik.mignoned.bzh/fr/accueil | |
| titl | Bienvenue sur Boutik Mignoned | |
| endalc'h | Vêtements, livres, jeux, accessoires, badges, décapsuleurs, autocollants... pour mettre du breton dans votre quotidien ! Boutik Mignoned est une boutique associative en ligne.. Vous y trouverez les goodies de plusieurs associations bretonnes. | |
| bouton | Nous contacter | |
| metatitl | Articles en langue bretonne | |
| meta-deskrivadur | La boutique associative où tous les articles sont en langue bretonne. Pour faire un cadeau en breton, pour vous faire plaisir ou pour soutenir une association. Vêtements, CD, accessoires, livres... | |



Treiñ pep tra pe get ?

Gwelloc'h e vo an daveiñ ma vez troet pep tra met marteze ho po dibaboù d'ober. Hon ali : troit da gentañ ar pajennoù lennet ar muiañ hag ar re na cheñchont ket. Ma ne gomz ket brezhoneg ho mestr-gwiad e c'hell bezañ diaesoc'h diorren ar rummad "keleier" e brezhoneg, nemet ma vez kemeret ur c'houmanant evit troidigezhioù diouzh an ezhomm (deuit e darempred ganeomp evit gouzout hiroc'h diwar-benn ar pourchas-mañ).



Deuit davedomp

Mignoned ar Brezhoneg a c'hell ambrougiñ ac'hanoc'h (aliou, troidigezhioù, adlenn). Deuit e darempred ganeomp.

An diorren web

N'eo ket dibosupl skrivañ e meur a yezh war ur bajenn met dizaliañ a reomp deoc'h ober-se.


Fall e vo ho taveiñ gant ar mod-mañ d'ober. Kalz gwelloc'h eo eilañ pep pajenn en ho CMS (sistem merañ an endalc'had).

Evit ma vo aes labourat gant an div yezh er memes back-office n'eus nemet da grouiñ renabloù disheñvel evit pep yezh. Ar renabloù-mañ a c'hell bezañ gwelus e chomlec'h URL pep pajenn pe pas (deoc'h-c'hwil da zibab).

Gwelloc'h eo ober get anvioù ar yezhoù en o yezh (français / brezhoneg / english / portugês...) e-barzh ar roll cheñch yezh. Ho tizaliañ a reomp ober gant bannieloù evit aroueziañ ar yezhoù rak ur banniel a dalv kentoc'h ur vro eget ur yezh. Ouzhpenn ur yezh a c'heller komz en ur vro hag ur yezh a c'hell bezañ komzet e meur a vro : galleg a gomzer e Suis, Belgia hag all, saozneg a gomzer e Rouantelezh-Unanet, Stadoù-Unanet hag all, portugaleg e Portugal, e Brezil hag all... E Breizh e vez komzet brezhoneg, gallaoueg ha galleg da skouer.

Sachit hoc'h evezh war ar sinoù diakritek (evel an ñ pe c'hoazh an ù) hag a c'hell bezañ diskwelet mat. Ma vez un urzh lizherennek e-barzh unan eus ho rubrikennoù eo ret deoc'h derc'hel soñj e vez traoùigoù disheñvel gant al lizherennek vrezhonek :

https://fr.wiktionary.org/wiki/Annexe:Alphabet_breton




E galleg (FR), saozneg (EN), allamaneg (DE) ha brezhoneg (BZH) eo lec'hienn Distillerie des Menhirs.



Bloaziadur al lec'hiennoù web e .BZH

Kavit ar Breton a-vicher a-zoare



Lec'hienn an astenn .BZH Ar sinoù diakritek ñ ha ù a zo diskwelet mat.

Ho lec'hienn liesyezhek hervez ho CMS (pe SME)



WordPress

Bez ez eus pluginoù liesseurt . Hor muiañ karet : WPML ha Polylang. Staliit ar plugin (deoc'h da zibab unan hervez hoc'h ezhommoù).

Gant WPML : digorit ar skoazeller staliañ. N'emañ ket ar brezhoneg e-touez ar yezhoù rak-kefluniet. Met arbat pennfoliñ ! Aes eo da gefluniañ :

<https://wpml.org/documentation/support/editing-wpmls-languages-table/>

Gant Polylang : Ouzhpennit ar brezhoneg e-barzh ar roll nevez "Langues > configuration" hag a zo war ho taolenn-stur. Bez ez eus un teuliadur e saozneg evit ho heñchañ d'ober ar peurrest :

<https://polylang.pro/doc-category/getting-started/>

Joomla

Genidik eo al liesyezhegezh e-barzh ar CMS-mañ. Dihunit ar pak "brezhoneg" er roll merañ ar yezhoù. Heuliit un tutorial evit ar peurrest. Mat-tre eo hini Web-eau.net (e galleg) :

<https://www.web-eau.net/blog/joomla-multilingue>

Drupal

Genidik eo al liesyezhegezh e-barzh ar CMS-mañ ivez. Dihunit ar modulennoù er rummad "multilingue" eus ar roll "extension". Ouzhpennit ar brezhoneg hag heuliit ar strurlevr (e saozneg) :

https://www.drupal.org/docs/user_guide/en/language-add.html



Da gaout soñj

Lakait ar meta-titloù, ar meta-deskrivadurioù hag ar chomlec'hioù URL da vezañ troet ivez evit ma vo gwelusoc'h ho lec'hienn war al luskerioù klask !
Soñjit en astenn .bzh evit hoc'h anv domani.
Kod ISO ar brezhoneg zo "br"; hag e god lec'hel zo "br_FR"



Lec'hienn merañ implij amzer tud a-youl vat Volunteo a zo diorret e galleg, e saozneg hag e brezhoneg.



Un embregerezh siber-sederoni eus Gwened eo Lorcyber. Lakaat a ra he orin war-wel gant an astenn .BZH hag ul lec'hienn troet penn-da-benn e brezhoneg.